

POBL VREIZH

C'HWEVRER 1978
NIV. 97



Pobl Vreizh

Ur peisant eus Bro-Lannuon skarzhet e maes eus e venaj (gw. p. 8)

HARPIT POBL VREIZH

KRP 2746-89 ROAZON
CCP RENNES

Be listennad

Claude L.G., Herblay (95)	20,00 L
Paul G., Pont'n'Abad	20,00 L
Liliane G., Paris 17	20,00 L
Hubert C., Bagneux (92)	20,00 L
Yann-Ber B., Foujere	20,00 L
Marc-José R., An Oriant	20,00 L
Loig Kervoas, Lannuon	20,00 L
Daniel P., Brest	20,00 L
Yannig Rogas, Angers (49)	50,00 L
Yann-Ber P., Ploubalae	20,00 L
Ann Mari Ar Bras, Roazon	20,00 L
Mikael F., An Oriant	20,00 L
M.L., Fontenay-s-Bois (94)	30,00 L
Fulup L.G., Laval (53)	20,00 L
Yann-Ber S., Ploufragan	25,00 L
Loig Chapel, Montroules	70,00 L
Mona B., Gwengamp	20,00 L
Yann Gristof Cassard, Naoned	20,00 L
Marcel La Moing, Gwengamp	20,00 L
J.L.G., Plerneuf	20,00 L
Yann-Ber Priou, Lannuon	20,00 L
Mikael F., Plougin	10,00 L
Julian E.M., Kemper	10,00 L
Saig Olivier, Brignogan	20,00 L
Alan M., Brest (29)	20,00 L
Iffig B., Fontenay-aux-roses (92)	20,00 L
605,00 L	

Diwar al listennadoù all 4861,20 L

En olli 5466,20 L

Kresket eo bet ar gess un tamm ar mis-mañ. Trugarez vras d'an oll re a weler, beb mis-avelse, o kass o gwennien, sioul ha dri-croas, d'o c'hasetenn bolitikel vrezhoneg n'eo ket. Ar Vretoned ne skrivont ket kalz, e brezhoneg d'an nebeutañ : an dra-se a ouler pell zo. Med evel ober ur chekenn, ne vez ket re-tad gwall bell ! Ha ken duan e verker 100 L e-lec'h 10 !

Mil weler a dimp ho kwennien, lennerion ha komanterion ger ! Gante ez omp deuet a-brest da wellad stumm ar gasetenn, da rei ma vez red dimp kaoud beb mis d'ho hag ouzhpenn !

Setu e c'houlennomp diganeoc'h, stard ha vrezh mernes, derc'hel, derc'hel da gass dimp hoc'h aluson. Hapt, Pobl Vreizh abed ! Hag e chom skortig c'hoazh Pobl Vreizh, d'hor menno. Eveljust hon eus bremañ 12 pajenn, e-lec'h 8. Med bihannaet eo bet ar vent ive. Setu, gant an 12 p-mañ, n'eus ket kalz miunoù-ha a zavez eged gant an 8 kozh. Kermerat e vez ar bajenn getañ en he fezh gant ur foto. Bravoc'h-a-se e vez ar golo, eveljust. Med, arabad deoc'h kredin : n'eo ket kresket an danvez nemed a nebeud tre.

Ar pal da zont eo lakad Pobl Vreizh da 16 pajenn. Pegoulz e vo tizhet ? Ahanoc'h-c'hwil e tepar ar wellenn-se, lennerion ha komanterion ger !

Klaskit komanterion nevez da b/Pobl Vreizh. Hag arabad deoc'h ankouad adkomanterion. Merket e vez war ar vanderion : komanterion echi. Beziñ war ewezh ! Trugarez vras ewid peb tra.

Pobl Vreizh

Ti-Moullerezh « Iroise »
29219 Releg-Kerhuon
Rener ar gelaouenn
Fañch Morvanou C.P.P.A. 50 091
1700 skwerenn



N'eo ket gwir ! N'eo ket folklor eo e vo e Roazon, da geñver meeting bras an UDB, d'ar sadorn 25 a viz C'hwevrer, da 8-30 nos, war leurgêr al Lissou. E vimp e kreiz ar c'hampagn : nann 'vad, n'eo ket folklor eo e vo, med politikel deus ar c'hentañ. Dale-hiñ wiji : d'ar 25/2/78, e Roazon, meeting bras BREIZH NEWEZ, meeting bras BREIZH DA-ZONT. Dredomp oll da ROAZON !

Da lennerion ha komanterion POBL VREIZH

Daoust ma n'eo ket gwall akustumet ar Vretoned da skrivañ, henn aber a raont o wechoù koulskoude. Pa na vefe nemed da b/Pobl Vreizh. Un dra vad eo. Embann a raomp al lizheroù, memes ar re blas an trenk gante un tamm !

Med o-wechoù e skriver da b/Pobl Vreizh ewid un digarez oll. Ewid goullenn tra pe dra, ewid gouzoud an dra-mañ-dra.

Ho peñf a raomp neuse, mar plij, d'ober ewelenn : arabad merkañ **meur a dra war ar memes lizher**. Grit 2 pe 3 lizher ma vez red. Ha neuse :

a) m'ho peus da skrivañ d'ar gelaouenn ewid an danvez aneñ, lakait war ho lizher : **Pobl Vreizh, skipailh-skrivañ/rédaction**.

b) ma fell deoc'h komanterion pe adkomanterion, lakait : **Pobl Vreizh, komanterion/abonnements**, gant ho chekenn.

c) ma fell deoc'h klemm dre ma n'en em gav ket **Pobl Vreizh** ganeoc'h, daoust ma n'eo ket achu ho komanterion c'hoazh, merkit : **Pobl Vreizh, merzerzh/service gestion**.

Gwellañ peus d'ober eo lakad 2 pe 3 golo-lizher e diabarzh un bras, gant ar meneg **rédaction**, pe **abonnements** pe **service gestion** war beb heni aneñ. Arabad kaoud oñ lakad ar gerioù-mañ e galleg hag e brezhoneg : lod deus ar re a zigor al lizheroù hag a ingal aneñ e zeberr e brezhoneg !

War ar golo bras neuse : **Pobl Vreizh** BP 304 29273 Brest-Cedex. Ha gwellaoc'h c'hoazh : **Pobl Vreizh, abonnements, rédaction, gestion** (m'ho peus ofer gant an tri « bu-rew »-mañ) ha neuse, war goloù an diabarzh, **abonnements** war unan, **rédaction** war un oll, h.a.

Trugarez vras deoc'h, lennerion ha komanterion ger !

RADIO - U.D.B.
Tel. (16.98) 80.18.47

KOMANANTOU
boutin : 30 L
skoaz : 50 L pe ouzhpenn

dre garr-nij : 50 L
estrenvro : 50 L

KRP ROAZON 2746-79
CCP RENNES

Kuit da gaoud riw er gouañv-mañ, galwit heb dale

Eujen KEMENER
e Tre-Laouenan
(etre Kastell-Paol ha Landi)
pellg. 69.98.98
pe e Brest (Str. Villeneuve)
pellg. 02.02.60

Fuel a vezo degasset deoc'h kerkent, lakait ho tommes-kreis e doare ha ruzet ar siminal Arabad m'gediñ hor bro, na dispign arc'hant dre ziewezh

UR VIGNETENN WAR AR SAOUT ?

Abaoe mis Gwengolo, sañset, ez eo red d'ar venajerion pacañ 0,0155 L war beb litrad laezh. Abalamour da beira ez eus bet laketañ un « taxe » newez war al laezh ? Diviset eo bet sevel an taoss-se gant ur gommission european, enni ur Breton brudet, an aotrou Mehaignerie, ministr al labour-douar, hag e vo red neuse klask marc'hajoù ewid dont a-benn d'o gwerzhañ. Ar yalc'h (600 milion a lurioù newez) a yelo gant teknokrat ar gommission eweljust, ha... gant un nebeud tud deus ar vicher memestra. Assantet he deus FDSEA ar c'h/Côtes-du-Nord, mes re ar Finister ha re ar Morbihan n'int ket akord tamm ebed. Na'het o deus ive re ar MODEF hag ar « Betanant-Labourerien ». Ur bern traoù n'int ket sklaer c'hoazh e-barzh an afer-se.



Bodet e Gwened a deus na'het peisanet Vreizh pacañ ar vigneten war ar saout...

— Piw a c'hounezo diwar an arc'hant-se ?

— Penaos e vo lodennet ?

— Perag e vez imporet amanenn eus ar Zeland-Newez gant ar Saoson ?

Ha bez' emae ar bed war an tu gin ? Deus un tu e vez roet primoù d'ar venajerion, bras o produksion. Deus un tu all, emae o sevel un taoss da bacañ ar pezh a zo en tu all d'ar gont.

Na'het o deus un nebeud tier-laezh deus ar Morbihan (Preval, Entremont, C.A.M.) sevel an taoss. Petra zo kaos ? Ma oa bet graet an taoss da harpañ gwerzh al laezh...

Tefival eo amzer da zont an tiez-laezh bihan ha heni ar menajoù bihan. Tiez bras eo a raio wardo an arc'hant-se da gass amanenn ha laezh er maer ar vro. Disterroc'h e vo c'hoazh gouindegezh ar venajerion vihan. Sklaer eo : red eo skarzhañ aneñ. Ne zegassont ket trawalc'h a brofit. Produktourien vras eo a fell da kapitalistad ar gouarnamant

kaoud. Koulskoude ne vo ket tremenet lost al leue dre genou menajerion Breizh. Evel 15 departamant eus Sud-West Bro-C'hall, e vo red dehe derc'hel penn hag e larfont NANN d'un taoss newez diwar al laezh. NANN d'ur vigneten war ar saout !

Jakou ar C'houer

Votiñ ewid

an UDB

ez eo votiñ

diw wech :

**ur wech ewid an tu kleiz,
ur wech ewid Breizh.**

Komanterion da b/Pobl Vreizh

Ar gelaouenn bolitikel nemeti e brezhoneg penn-da-benn
B.P. 304 - 29273 BREST CEDEX

Hanw hag hanw-badez
.....
Chomlec'h
.....

a gass e gomanant Boutin : 30 L (1)
Skoaz : 50 L pe ouzhpenn (1)
Estrenvro : 50 L (1)

Amañ an arc'hant dre chekenn-bost (1)
dre vandat-lizher (1)
dre chekenn-vank (1)
CCP RENNES 2746-79

(1) Diverket ar gerioù na serjont ket

Abadennoù da-zont strollad-c'hoariva ar Vro-Bagan ha strollad Karaes

ewid harpañ skolioù brezhoneg **DIWAN** :

12/2 : e Bro Landi (Gwilkourvest moarvod) ar Vro-Bagan

14/2 : er PAC, e kêr Vrest an deou strollad

15/2 : e CSF-Thomson, Brest, 9^e nos ar Vro-Bagan

17/2 : e Dineol, ar vourc'h an deou strollad

18/2 : e Lannuon, e sal ar sportoù an deou strollad

Strollad Karaes a c'hoario Piknik pad ar brestel, strollad ar Vro-Bagan a zislego Ma c'hellje-me kanañ laouen. 15 gwech betekenne eo bet c'hoarivet pezh Karaes, ha 17 gwech heni ar Baganis.

LENNIT POBL VREIZH

Pobl Vreizh



Roc'h-al-Lazh pe Roc'h-Laeron

Roc'h-al-Lazh pe Roc'h-al-Laeron ?

Nag a istorioù zo bet kontet dija diwarbenn Roc'h-al-Lazh hag al Lew-Dreazh etre Lomikel ha Plislin. An heni kentañ sur awalc'h, eo bet heni Sant-Eflam oc'h arround eus bro Iwerzhon hag o reñf sikour d'ar roue Arzhur ewid lazhañ ul loen gouez — un aervout — a vevse ase en ur c'hev.

Goude an bet Roc'h-al-Lazh repu laeron a bet gant kuzhet mad e-barzh ar c'hoant. Goude bremañ ? Loened gouez ha laeron zo newez zo c'hoazh, promotourien a beb sort, lonkerien aoc'hou... Daoust-hag-eñv e vo savet benn-ar-fin gant ar «C.M.A.» pamezgi ti war dachenn « Park an Aod » tostig tre doc'h Roc'h-al-Lazh ? Herwez klewed, e vo prenet an douar gant an de-

partamant pe gant ar rannvro, hag « Park an Aod » e vo feurmet endro d'ul labourer-douar.

Gwell-a-se ! Paotred an UDB n'int ket ken droug ha Sant-Eflam. N'o deus ket c'hoant lazhañ dragon (pe bromoteur) ebed. C'hoant lakaod anezañ ken doñv hag ur marc'h, ne lavarañ ket. Ur marc'h hag a labourou ewid mad ar Vretoned ha nompas ewid un nebeud tud pinwidig.

S. Sant-Laorañs

Goude skrid : herwez klewed, ema Sant-Eflam o paoves goulenn mont e-barzh an UDB.

TRAWALC'H

Strakal a ra an traoù e Breizh : ne var ket derroisted beteg pelec'h mont ken. Kaset bet d'an traoù, pepar bloaz zo, peul meur Roc'h Tredudon ; abaoe paotred ar plastik n'o ket esperet an davez-mañ : diles eo ober gont eus ar savadurioù pilet pe fimet. Bewec'h e vez lakaet buhez tud en arvar. Unan eus paotred ar plastik zo bet lazhet gant e vombezenn : unan hag en dije graet kement all a draoù ewid e vro ma vije chomet bew...

Un hent-dall eo heni an derroisted hiziv an deiz e Breizh. Na boud eb a fall an traoù en hon bro, n'eo ket gant ar plastik an heni e vo gwelllet hor stal. Ar c'hoant eo.

Bewec'h ma strak an traoù, e sav ar Vretoned a-eneb d'an doareoù-se. Hag e savont a-eneb da gemet tra breizheg. FLB, RTB, UDB : toud bar memes sach'h ; terroristed vrein toud, an oll gwellbunan.

Re laouen e vez re ar gouarnamant eus ar meskaj-se. Bez e c'hellont frotañ o daouarn. Hag e weler *Bécam, Bonnet* hag ar sort gante o skandalioù o'huschal...

Eveljust ez eo fall tre an doareoù a ra an derroisted gante. Red eo o c'hondaoniñ didruet, ha stard, ha krefiv. Paotred ar gouarnamant n'int ket direbec'h ewid-se. Pell allano. Dre o faot eo ma' ma Breizh er stad n'ema. Diozh re ar gouarnamant e teu an direzhdad hag ar gwail-nerzh da gentañ.


Bewec'h ha dalc'himad eo bet kondaonet re an ARB, FLB, Trawalc'h, h.a. gant an UDB. N'eus ket plass e Breizh ewid ar stourm gant armoù hiziv an deiz.

Ni, en UDB, n'hon eus netra da welet gant an dud-se. Ur gaoz bras a raont doc'h ar Vretoned : lakaad anebe da gaud muioc'h a fiziañ c'hoazh e-barzh ar gouarnamant.

Emrenerien omp, ya : beset Breizh emren, ya. Klaskomp tizhouz ar pal herwez rekennoù an demokratezh, heb c'hoari gant an armoù. Emrenerien omp, med plastikerien n'omp ket. Trawalc'h gant Trawalc'h a-benn ar fin !

UDB

RADIO - U.D.B.
Tel. (16.98) 80.48.47



Breizh neuse a oa trubuilhet
Gant loened gouez ha dragoned
Hag a wall-gasse ar c'hanton
Ha, dreist an holl, bro Lannuon

Barzhas-Breizh Sant Eflam hag ar roue Arzhur

SPONTUS AR BREZHONEG E TEIS...

Ema Teis ar bewenn bro ar brezhonieg ; unan a ziwezhañ parresioù Bro-Gwened eo ma vez komzet « breton » enni. Neusen, d'ar 17 a Vezheven 1977, tud ar c'husul-parres, tolpet en ti-kêr, ec'h ober o soñj reñf hanwoù brezhonieg da beder ru newez ur lotissamant... Ema rac'h an dud a-du.

Goulenn a ra ar mder neusen avis ar prefeti. Doned a ra un notenn ag ar prefeti ; kaset an notenn ged ar mder da gomission kulturel ar barres : difennet eo reñf hanwoù brezhonieg d'ar ruioù !

Neuse e c'houlenn ar gomission un displegudur dre skrid diged ar prefeti. Respont a ra ar prefeti nend netra a sort-se difennet, mes, herwez « avisou fur » « Minister an Diabarzh » (an Ao. Bonnet depute ar Mor-Bihan e penn anehoñ), ema gwel chom heb lakaad hanwoù brezhonieg d'ar ruioù !

Petra soñjal neusen ? Mad e oa an avis kentañ. Hama ! Narenn !

Mouezher an doare en ti-kêr (un tool ewid netra) ar wezh-mañ e chañcher soñj hag ema disklêriet null an avis kentañ. Ged piw ema ar galloud e-barzh an tier-kêr ?

Divis a ra neusen ur gusulieres ag an ti-kêr reñf he diles ag he c'harg, en ur zisplegiñ he soñj ar un trakt. Fonnapl e lâr an ti-kêr hag ar prefeti emaint a-du ged an diles-se.

Un afer « renket », pe un afer da voud heuliet ? A pa ouier eh eus e-barzh ar c'husul ti-kêr meur a unan é komz breton, e weler mad pegen don ema oet arallekadur (aliénation) speredoù hon pobl.

Lokaomp keñver-ha-keñver an afer-mañ hag ar pezh emaoer é c'h'rataad dimp e-barzh **Karta Kultur-rel Vreizh** (ne chom mui namaed tammou anehi) : gwelet a raer mad n'he deus pobl Vreizh netra da c'h'ortos diged gouarnamant **Giscard**, no diged ar c'husulioù-parres hag a embann emaint « apolitik ».

Kevrenn Gwened ar Sav-Heol

UR BLOAEZH MAD GANT POBL VREIZH !

TRI C'HOMANANT DA B/POBL VREIZH
GANT PRIS DAOU

Kaset ar bapereñ-mañ (1) en ur verkañ warni hanwhag adress d'au gouarnamant newez, hag en ur lakaad da heul ar paeamant (30 L x 2 = 60 L), gant ur chekenn.
Lakit ouzhpenn adress un 3^e komananter da vezañ kaset *Pobl Vreizh* dehañ ewid netra gant ur bloaz. Ma feat deoc'h e vo kaset kelou d'ar gouarnamantien a ressewo ho profadenn, lakit ho hanwhag hag hoc'h adress war al linenn diwezhañ. Troguez vras.

Komanant 1 :

Komanant 2 :

Komanant 3 (ewid netra) :

Komanantoù kenniget gant :

POBL VREIZH - Komanantoù - BP 304 28273 BREST CEDEX

(1) pe adskrivt anehi



Ur pennad zo dija eo bet embannet Deiz-taer Skol an Emsav. Da vezañ goulennet gant Skol an Emsav, 30 plassenn al lissou, 35000 Roazon.

Un ti-kenwerzh hebkén
e GWENED
e'nd an dilhad
gis Breizh

(kabigoù, mantill glaw hag all,
jiletannoù martolod)

TI AR C'HABIG
8, r. René-Rogues



AR VRETONED N'INT KET AELED !

Ar boesson hag ar viser zo evel breur ha c'hoar e Breizh ! Pell zo e ompienn an drase, mes gwell c'hoazh bremañ a-c'houde m'ema bet embannet ar **Le Peuple Breton** studiaden an Doktor Yann Daumer : ema ar Vretoned ar re gentañ, e-barzh ar bed a-bezh, ewid ar boesson. Nend eus ket a vout fier a gement-se, mes ne vehe ket fur iwe kuzhad an traoù-se, el ma vese kuzhet ar « pe-c'hedoù » gwezharañ : an tad hag e vese taolet er maes ag e di getoñ e verch krouadur geti, ha n'eo ket gwir e oa eñv an heni kentañ e tigorin an hent da v « makedoed » Paris ?

Hiziv an deiz n'eo ket un dra vad (ha n'eo ket gwall gourajus) lakaad ur mouch ar an daoulagad ewid nompas gwelad an traoù el m'emañ : ur gudenn sosial ha politikel e-mesk ar re vrasañ eo heni ar boesson. Mes an heni en em laka da voessonad, dre e wall ema, a laro an dud. El an dramma (Grogue), ur fesson eo da glask ankouad diassamantou ar vuhez...

Ma vez komzet uhel a-eneb d'ar boesson, red eo lared iwe ema ar pennoù bras, an notabled a-du getoñ e gwirionez, hag e kav ar c'hapitalism sav d'ar gwir e Breizh, d'ar gwir ar fallañ mem, ama red lared. N'eus ket kehidi-se zo c'hoazh, e-raog ar bresel 1914, pa vese daet kourz ar mouezherezh, e vese gwelet re an tu dehoù e paeñ tassadoù gwir ruz d'an dud, hag an heni a baee ar mutiñ e yae getoñ ar mutiñ a vouezhioù iwe. D'an m'emañ ar mouezherezh, lies e vese getoñ lod-kar e vouezhourion e tennoù getoñ ur revoluer pe ur fesson, getoñ brudini viktoer an heni en dese getoñ ar mutiñ a lommou...

Diabazh en em daol ar Vretoned d'an evaj, mem ma ne vez ket gwelad mui taolennou ken ispisial. Ur milouer eo ar boesson : ur milouer ma vez gwelad e-barzh ar pezh a zo kuzhet e diabarzh ar boessonour, milouer e tiskouezñ tud flastret, tud gwasket, tud lakad edan an treid getoñ ar re « rall », tud e klask un digoll, ne vern pehini... Un dra vantrus en em gavet e Naoned a ziskouez kement-mañ evad.

Eno e oa daou Vreton, daou baour-kaezh, divicher ha dilabour ar peb brasañ ag an amzer, a-wezhioù e'ch oer ar



G.R. Pabli Vreizh

vicher klochard, a-wezhioù e labourad un tamm benitag ; paour-kaezh tud, kouezet isel, e vevit en ur c'hoazh lojeris ag ar porzh, tud ag ar re a vez gwaet « lumpen proletariat » ane. Un deiz, setu ur Senegalad, 43 blé, e toned davete ; un docker e oa. Mes gi zo tud gwenn, gwenn eo o c'hrochen, setu, èlre-son, emaint a-us da hennezh, unan du. Pa vezer bet flastret getoñ ar vuhez, e vez bourrus kavoud unan d'ober poan de-foñ, kavoud unan maleurusoc'h c'hoazh, hag « henn lakaad d'andur ar poanioù ho'ch eus bet e'wi iwe diged ar re « rall », en ur lakaad un tamm mat a sadism hag a grizzer ar ar marc'had. Ase ema vañjañs ha digoll ar re n'o deus mui a esperañs ! ha pa vez kejet an traoù-se getoñ ar rassism, e tiskenner iselise, ya, ema ar re « rall » an ifern.

A-c'houde tri mis e pade kalvar ar paour-kaezh Senegalad. Ne vese bemnos namiad trous tud vez, getoñ forzh a huchadennou, ha gourdrous e-leizh. Ur wezh dija e oa bet torret dor e lojeris a daolhoù bouc'hal, ha burzhud e oa ma oa bew c'hoazh ar c'haezh Senegalad.

Ha neuse, un noswezh, setu an diskoulm : truezus, mantrus, « ordinal »,

ur « fait divers ». Ema ar sadorn aneñv unan ag e ameson a ya tre e-barzh lojeris hag a grog d'e bilad. En em zifenn a ra an heni du, ha roñ un taol getoñ a gountell ; brallañ 'ra an heni « rall », ha gouenn skour. Doned a ra e am, flastret, ur vouc'hal getoñ da zivarc'hini, ar wezh c'hoazh, dor ar Senegalad ha d'az-lazhiñ. Kollet getoñ e benn, e klask muiad pilad ar bolisser-pa 'n em gav ar re mañ ar ar lec'h.

Mar eo ar boessonour kentañ, aet an taol en e galon ; an daou arall zo bet lakaet bar prison. Daou Vreton a Vreizh-Isel hag ur Senegalad ; tri den flastret getoñ sossiete Giscard, el ma zo kementrall ane. Torfed ar rassism, ar viser, ar boesson, heni ar boesson dreist-toll, rag getoñ ar boesson an heni eo e vez ankouet miser ha disenor an isproletariat ; ar boesson eo an heni a laka tud d'ober droug d'unan du, Bretoned vad, Bretoned a ouenn vad ar re-mañ, hag a glask, dre ar gwir ruz, ankouad o stad isel, o mezh pemdeziet, hag a c'houlenn getoñ ar gwir ruz un tamm konfort, pa vezont oadet don e-barzh an disesper. An heni ema bet kollet getoñ an esperañs n'hell ket sovel e benn ha stourm...

Ha bremañ ? Ha red e vo difenn gwerzhif alkoal ha gwir ruz pa vo bet lakad ur sossiete sosialist e lec'h heni Giscard ? Trist e vehe, ha didalvoud. Dalc'homp soñj ag ar « prohibition » hag ag an « Incurruptibles » er Stadoù-Unanet ardro ar blé 1930. Ar pezh a zo d'ober, sur, ema difenn gwerzhif ag ar gwir-se nend eus kalz a chugon-resin e-barzh. Mes red eo sellad pelloc'h. Ur sossiete sosialist a vo unan ma c'hello peb unan, ya, oll labourision hon bro, ar vicherourion, ar beianted, preññ gwir mad, kavoud mad ar gwir mad, heni Bourdel, heni Bourgoen, ar Champagn, hag all, hag hon Gros Plant iwe èlre-son, getoñ ar Muskadig. Un afer a chervad eo iwe ar sossialism : gwaet eo peb tra vad hag a gaver ar an douar ewid eustrud ha plijadur an den. Un tamm plijadur diar eved ur werennad gwir mad, pe zi, pe deir, ne ra ket a zroug. E kontrol, Adal ma chomo an den sonn ar e dreid, èlre-son.

Yann Lokireg

TRO VREIZH DAOU GANER

Ewid harpañ krogad ar votadegoù da-ont, ha da-ont ar sossietes d'an UDB, e kano an daou-mañ, **Le Forestier** ha **Alan Stivell** : mañ a lec'h e Breizh, 7 gwech **Le Forestier**, ha 10 gwech **Alan Stivell** : gant gant gred d'o gwelad, lakait tud da vont assamblees ganeoc'h, ha d'as re yaouank, brudit ar c'heloù !

Goud a rit e koust ker lekaad 17 kandidat war ar renk. Re an tu dehoù o do, lod ane, beteg 40 milion a lurioù kozh ewid souten unan hebken eus o c'handidated. En UDB, e klaskomp kaoud 30 milion a L. Kozh ewid harpañ hon 17 kandidat. E-pelec'h ema ar justiss ?

Forzh penaos, dont a raimp a-benn eus hon jeu. Med arabad ankouad, lennerion ger, abadennoù **Le Forestier** hag **Alan Stivell** !



Pabli Vreizh

MAXIME LE FORESTIER

- 27/1 Sant-Brieg
- 28/1 Brest
- 1/2 Montroules
- 2/2 Naoned
- 3/2 An Oriant
- 4/2 Gwengamp
- 6/2 Roazon


ALAN STIVELL

- | | |
|-----------------|-----------------|
| 10/2 Sant-Maloù | 16/2 An Oriant |
| 11/2 Sant-Naser | 17/2 Brest |
| 12/2 Naoned | 18/2 Karaes |
| 14/2 Montroules | 21/2 Sant-Brieg |
| 15/2 Lannuon | 22/2 Roazon |

En diavaes eus an traoù-mañ, dalc'hit soñj : d'ar 25/2 nos e ROAZON, Leurgêr al Lisoù, meeting bras an UDB



Pabli Vreizh



PROGRAMME DEMOCRATIQUE BRETON UDB

Deuet eo er-maes **Program demokratel Breizh**, ul levrig 67 pajenn ennañ. A boues bras eo al levr-se ewid gouzout petra vo Breizh dazont, pa vo mestr ar Vretoned war o aferioù.

Diskouez a ra ar PDB e porsort stad ema hon bro, dre faot ar sistem kapitalist ha kreisennet... Ha poent bras eo d'an oll Vretoned, kar-a-bro ha kar-an-tu-kleiz « krogid e-barzh », ha prepañ an hent a gass d'ar sossialism.


5 L an tamm, ha 2 L ewid ar misoù-kass. Goulenit an tamm levr burzhudus-se digant re an UDB.

AL LIAMM

ar gelouenn nemeti o roñ, 6 gwech ar bloaz barzhonegoù, kontadennoù, pennoù a beb sort ha keleier 80 pajenn e peb niverenn. **Riser** : Roman Huon komanant 35 L — Studierien : 25 L. Teñzor-merour : P. Le Bihan - 16, rue des Fours-à-Chaux ST-SERVAN 35400 ST-MALO - CCP 5349-06 PARIS

AR FALZ

kelaouenn drimiseg an Emsav diasetet gant Yann Sohier, bodet ennañ skolarerien ha kelennerien Vreizh a-du gant ur skol vreizheg ha laik gwirion **Lennit Ar Falz ! Komanant d'Ar Falz !** (30 L ewid 6 niv.). AR FALZ, Str. Kan-A-Gwez - 29245 PLOURIN-MONTRouLES KRP 430-20 H ROAZON



VOTIT EWID AN UDB, MALL BRAS EO !

Eh omp é tostaad doc'h an 12 a vis Meurzh. Pa'n em gavo an nive-renn-mañ a **b/Pobl Vreizh** gant hon lennerion, e chomo ur mis bennag e-raog deiz bras ar mouezherezh. Setu n'eus ket amzer da goll : mall bras eo bremañ gober ar choas, hag **ar choas mad**.

Ewid Breizh, hec'h amzer-da-zoned, hec'h emrenezh, n'eus namaed ur choas mad : **an UDB**. Lies hon eus skrivet ha lâret : **heb UDB, Breizh ebed**. Lod a lâro marse eh omp gwall fier, gwall garget a vrasoni, gwall dechet d'en em lakaad uhelloc'h ha kreñvoc'h ewid ma 'h omp e gwirionez. Nend omp na re vras a galon, na re orgouilhous. Ema hon treid genimp àr an douar. Gouied a raomp petra omp, petra e c'hellomp ober, petra n' hellomp ket. Lod iwe, re ar gouarnamant, ha mem re an tu kleiz gall lies, a vez hon lakaad iselloc'h ewid ma 'h omp. Ewite ema **dañjerus** an UDB. Elreson, peogwir e lâr ar wirionez d'ar Vretoned a-zivoud o bro, ha peogwir e tiskouez boud **un esperañs ebet ar vro**.

Ya, lâret hon eus lies : **heb UDB Breizh ebed**. Hag henn lâred a raomp ur wezh muioc'h. Re an tu kleiz gall, bet sinet gete ar **Program kumun** — a zo bet gwraet tammou getoñ bremañ — n'int ket ewid ober kalz tra ewid Breizh. Ewid Frañs a-bezh, ya. Mes un dra zo ha nend eo ket da vout ankouaet : ar **PCF**, ar **PS**, an **MRG** zo anehe strolladoù diasezet e Paris ha Kreisennet e Paris. Na boud e tay chañchamantoù gete mard eh aont e-barzh ar gouarnamant, n'eo ket possubl dehe lakaad an traoù da chañch a-grenn ewid hon bro. Hag ema red neoazh lakaad an traoù da chañch a-grenn. Kant tra a vo kavet d'ober gete, e-raog soursial doc'h ar Vretoned, e-



Keneherv - Pobl Vreizh

raog soursial doc'h ekonomiezh hon bro, fall tre he stal geti. Setu ema red dimp kaoud an **emrenezh**, boud libr da soursial ni hon-unan doc'h hon traoù-ni. Nag ar **PCF** nag ar **PS**, nag an **MRG** n'int prest da roiñ hec'h emrenezh d' hon bro. N'int ket ewid ober an dra-se : ewite n' eus namaed Frañsion hañval rac'h, ag ur penn d'ar Frañs d'an arall. Mem mar gwelent — hag e raont — ema dileset Breizh a-c'houde kehid-arall, mem mar kemeront en o frogramoù lod-kàer ag ideoù an **UDB** — hag e raont —, nend eo kement-se namaed ur fesson da rekuperiñ an eost hon eus-ni hadet, ewid klask hon diskar, hon isellad, hon lakaad da netra e spered an dud. Emaint é klask eostiñ mouezhioù ar Vretoned diàr hon koust-ni.

Nend eus ket a vout dallet. Ema an **UDB** àr 17 tachenn-mouezhiñ e Breizh. N'eus namaed an **UDB** o respont en ur fesson efedus ha penn-da-benn da zoberioù bras hon bro.

Re ar **PSU** hag ar **Front Autogestionnaire Breton** ema ur sort gete.

Bremañ e lâront iwe emaint emrenerion. Awel ha moged. Emaint, int-i iwe, é rekuperiñ hon ideoù.

E Breizh, ewid difenn ar Vretoned, o bro, o ekonomiezh, ewid lakaad un termen d'an dilabour, d'an divroañ, ewid torriñ nerzh ar c'hapitalism en deus kasset hon bro beteg bewenn ar bez, n'eus namaed an **UDB**. Mall eo d'an oll Vretoned **dihunet** henn ansav. Grataad a ra an UDB d'ar Vretoned, n'eo ket al loar, mes gwell : **ar baradoes àr an douar!** Netra muioc'h, netra nebeutoc'h !

Eh omp é voned, edan berr, d'ober ar gont ag ar re a venn difenn o bro ha diaseziñ ar sossialism enni. Ahanoc'h-c'hwil, Bretonek kar-o-pro, e tepant ar marc'had. Ged ho mouezhioù e c'hellit lakaad **uhel** ar gont-se.

Neusen, heb koll ho mouezhioù a beb tu, **votit ha lakait votiñ ewid an UDB**. Ar strolladoù arall ne spiront ket doc'h Breizh.

Heb UDB, Breizh ebed !

UDB